




Photo Charrouin, St-Pol-de-Léon

# BUEZ POTRED TREFLEZ

« Pa vezont e kear Vrest e werza ho legumac'hou »



I

Selaouit kana va mignonet  
Ar zon nevez a zo komposet  
Heur zon, ag a zo ar vrionez  
Diwarbenn potred ar c'harottez

II

Ar c'hommerziou eur pennad a zo  
Siouaz !! ne zeont ket kaer en dro  
Poan braz ho deuz war ar meaziou  
Kaout arc'hant vit ho legumachou.

III

Goulskoude, an holl a oar ervad  
War ar meaziou c'houzor labourad  
Potred treflez c'heller lavaret  
Ne jomont ket noz deiz da gousket

IV

Kerkent a diveur e maint war zao  
Aliez dindan n'avel pe ar glao  
N'ho deuz ket aoun vit beza glepet  
Andraze emez'ho eo ar cec'het

V

E kear vrest, kerkent erruet  
Wur ar marc'hajou vezont gwelet  
An taol'deuz, vit deseo ar merc'hed  
Lavaret reont ket vezoni nec'het

VI

Tostañt merc'hed et n'ayez pas peur  
Regardez nos carottes, nos choux-fleurs,  
Nos légumes sont d'première qualité  
Plus beau qu'ça, vous n'avez pas trouver

VII

Ar merc'hed e Brest vel e leac'h all  
M'euz gwelet zo mad da jipotal  
Raok ma prenont ho marc'hadourez  
Vez gantor eu bern chipoterez

VIII

Aliez vez echu ar marc'had  
E chom da verza m'heur a eac'had  
Ar botred jomont ket da nec'hi  
Mont reont da jina ti à ti

IX

Gwelet vezont ebarz ar ruiou  
Kinnig d'ar merc'hed, n'ho dorjojou  
« Allo merc'hed, choux-fleurs, karottez  
Traou kaer velse gavoc'h ket bembdez

X

Pa vez giwerzet ar varc'hadourez  
Pa vez ganto echu ho dervez  
Neuze c'heller gwelet ar botred  
Pegen laouen e vez ho speret.

XI

E ti Doucen an aliessa  
Vezont e trebi ag o c'heva  
Rag en tize, e c'houzor ervad  
An holl a vez digemeret mad

XII

Ag en eur zistrei da Dreflez  
Ar botred vez klevet aliez  
Dinec'h ho speret, ag a vouez penn  
Assemblez c'hober er ganaouen

XIII

Ag en ho zi kerkent erruet  
Lorc'h enno lavaront d'ho merc'hed  
Tre ma homo ganeomp iec'het  
Arc'hant deoc'h vezo digasset

Francis MOAL.

« Vit ho frikojou ; m'ho peuz c'hoant klevet  
kana soniou Brezonek, a soniou kaer, skrivit  
d'ar Barz Francis Moal « Alc'houeder Leon »  
ag e c'herruo da gana deoc'h kement a ma  
karoc'h »